

(357)

Disput
Etre un Den Cōs hag un Den yaouanq.

An Den Cōs.

Arsa ta, eme ar Pot cōs, mar deo me a gomand,
Gra evel a lerin brema zoudes vatant;
Ja, ha teul plêt mat na varques da ober,
Rac me yêl da velet evel m'am bo amzer.

An Den yaouanq.

Un dra dervubl è, m'en asur, da glevet ha te cōs,
Dont da gomandi din out ordinal en cros;
Un den cōs evel dout, zo meurbet insolant
Dont da gomandi din, rac me zo den yaouanq.

An Den cōs.

Ne glêfes get, yaouanq, qemer an ardians
Da gozeal eus cōs nemet dre gomplezans:
Cleout a res gouscoude doug'en ar respet din,
An amzer a castio, gra evel a lerin.

(358)

An Den yaouanq.

Tremenet eo da amzer da verza respetet,
Da garout a vir galon serten ne allan get;
Da garout a vir galon birvigen na rafen,
Me a ve crouget gentoc'h eus an huella queren.

An Den cōs.

Ne ouzout get, yaouanq, ne ouzout get erfat,
Pa ve amân eur fest pe eur banquet benac,
Pa ve amân eur fest p'otramant eur banquet,
Cōs er peñ huella an dol a ve laget.
Yaouanq a vo laget en peñ izella 'n dol,
Erit rentâ da gōs e peb feson honor.

An Den yaouanq.

O jarnitatiegoai, an dra-mañ sur am glas,
Guelet en ober din prezant dirac va fas,
Guelet e ven laget er pen a ziadraon,
Ha d'ar pen huella e c'ha 'r boutaill atao.

An Den côs.

N'ouzout get, Den yaouanq, ne ouzout get erfat
Eo dorn an hini côs a c'ha genta er plat?
Hag a varcho aroc etro ar prosesion:
An yaouanq varlerc'h côs e peb condision.

(359)

An Den yaouanq.

Me voar erfat, pot côs, gant da squilfou merglet,
E vo er beg aroc en eur fouri bepret;
Me voar erfat, pot côs, m'en asur hag er goar,
Me voar pelc'h e zi: en un toul en douar.

An Den côs.

Me voar erfat, yaouanq, n'en don get asuret,
Me ne ouz get va heur nag ive va moment;
Yaouanqoc'h evidout ameus guelet o vonet,
A meus guelet o vonet, ha me a zo chomet.

An Den yaouanq.

Me vel erfat, pot côs, ervez da brepozioù,
Ne c'heus get c'hoant da vervel na dilezel da vadou;
Ober a ri gouscoude, mont a ri d'ar bed all,
Hag e serigni da gent, mes en eur fêson all.

An Den côs.

Me voar erfat, yaouanq, ne don get asuret,
Me na ouz get va heur nag ive va moment;
Me zo evel un tol dins a sqô en avantur,
Evit gant a goeo, cos guerzen a rai sur.

(360)

Selaou amañ, yaouanq, ar pezh a lavariañ,
Ja, ha teul plêt mat d'ar pezh a anonsañ,
Ha mar a pe de plac'h ebet eus ar c'hontre,
E renqi gout gant côs ha clevet an doare.

An Den yaouanq.

Te a zo loud ha côs, da verc'h a zo fragil,

Me zo eun den yaouanq zo subtil hag agil ;
 Ma lagafen va foan da asten va fajou,
 Me ambrasfe da verc'h hep da c'hourc'hennou .

An Den côs .

(361) Ha posibl ve , va merc'h , e ves-te a-unan
 Gant eul libartin fal a gomz evel emañ !
 Ja , emezi , va zad , er garet a rân tur,
 "Den a fêson eo , na servich get nac'h sur .
 Me zongje din , va merc'h , e voas-te chast ha pur ,
 Mes sede grêt ganet sur eur goâl avantur :
 Qê gantân ta , va merc'h , evit tervi da c'hoant ,
 Mes ne fi'o dig'enén na madou nag arc'hant .

An Den yaouane .

Sede me bet ar verc'h , mes na doun get contant ,
 Mont a rân bete 'r pot côs evit goulen arc'hant .
 Debonjour d'êc'h , pot côs , hag ive va zad-gaer ,
 Setu me deut d'o caout , hag e comzân dre gaer .
 Ho merc'h a zo gouël baour , ha me a zo ive ,
 Ma na g'irit hor sicour , ez imp da glazq hor boüed .

An Den côs .

Guechal te lare din e voas yaouanq ha dispos ,
 Ha n'am estimes get abalamour ma voan côs ;
 Sorti ermes va zi , na zel get var da lerc'h ,
 Pe , mar crogân em bas , me roio dit da g'erc'h .

An Den yaouanq .

(362) Fors a grîân var gôs , memeus var boez va fêñ ;
 Toret en deus va fri , hag ive va oll dent .
 Bet oun o c'houlén outân , emon dindân va brec'h ,
 Sellit ar fripon côs nag a nerrz zo 'n e vrec'h .

An Den côs .

Ha c'hoas em depites memes dre da gomzou ;
 Ma n'en dout get contant , serten me contantô :
 Deut amañ din va bas , pa m'ou en ompinion ,
 Ma c'hoariin un tolad var g'ein an tam fripon .